


GARDE DES
BORDS DE L'ADOUR



INONDATION EÜZUS

*Eus ar rivierou bras al Loir, ar Rhôn, ar Mén,
an Adour, ar Vâr ha re all.*

Eus a bep tu e receiver qêlaouyou an trista var dic'han ar rivierou-ze. An tuniou savet evit goaranissa eus a furor ar rivierou vras a zo disac'het oll. Ar pont-jou a stracle horribl en eur gûenza dre nerz furorus an doureyer. An draouniennou a zo mac'houmet oll ha rentet evel mûriou. Ar glao a gûez evel eun diñuch. Henvel awan an oll gontreou maleïrus-se a zo eun dra impossabl.

En calz eus a guériou, ar poraiou mât bac ar vagasinou a voa leun eus a varc'hadourez : oll e zint distrujet ha traynet gant an doureyer.

Bourguiou antier a zo bet distrujet ha traynet gant an dour.

An hentchou-bras a zo oll dispennet. An antrepoyou coad ha glaou-douar a zo iveau et gant an doureyer.

Ar o'hollou bras a ra ar guér a Roann a zo impossabl da niveri. En nôsvez ar 17 d'an 18 here, 112 ty a zo bet distrujet. En c'han Digoin e zeus collet evit ouspen talvoudeuez eur million a varc'hadourez. Eun ty a gommerç hep'gen, en devens collet evit tri-c'hant mil franc a c'blaou-douar.

En Andrezieux, en Balbigny, e zeus discaret calz a dyez. Lavarat a rêt memes e zeus calz a dud beuzet.

Ar general hac an tocsin a zoù a bep tu, evit guervel sicour. Ar vilagennou d'vardro ar guér a Orleans a zo en eur stat an horrupla. Calz a dud a zo beuzet. An diliançou na voitur ar post na ellont mui tremen. Gant eun niver bras a vagou eo e ranquer ober tor, hac an doureyer a zo q'en horrublamant huel, ma tremen ar vagou-ze a uz ar gouez hac an tyez lounget gant an doureyer. Bep moment ar vartoloded a vel corfou tud beuzet hac anealed o tremen gant an dour.

Lorre Clermont ha Montbrison, eur gorventen dour demeus a ouspen tri-
uguent troatad, e deus ravi jet qement e deus cavet var he hent, ha discaret daou-
uguent iy. Dilijanç Lyon, en pehini e voa nao beajer, a zo bet traynet gant an
dour, ha c'hoec'h hepken e deus ellet en em savetât ouz en em grappa en bagou
ar gouez ermès an dour.

Eun dilijanç a zo en em gollet, gant an dud a voa ebars, hac ar som a zaou
c'hangt mil franc en arc'hant.

Netra a gaeroc'h eguet courach vras person Dampier, pehini, dre e guzuillou
vad bac ar boarz e quenere én e-unan, a angajo ar vartoloded courajus eveltan,
d'en heuill nôs-deus en ereiz an danjeriou bras, evit diffamma eus a entre
daouarn ar mato criz eun nombr bras a dud, pere a vije bet beuzet anez an dud
generus ze. Dous en deveus o recompancest demeus o oll boanniou ha dangeriou,
en eur accordi dé o mennat.

O'hoec'h den varnaguent a zo beuzet en eun ty.

Qér Blois e deus meurbet collet. Eun druez e voa güelec bugale ha graguez di-
vardro, anter-noaz, direded da glasq sicour.

Autrou Escop Blois hac e velyen o deveus rentet meurbet a zervich en darvoud
euzus-se. Dre o soign e zeus bet fournisset boued d'an dud maleurus-se. Ar re o
devoa ellet savetat unan benac eus o anehaled, o deveus o dastumet en courtjou
hac en jardinou an escopti.

Etouez calz eus a actionou gaer, e tleer remercout ar gundu dalc'het gant an
AA. Raulet ha Percheron, dameus a gompagnuez jandarmet Blois, pere o deus
bet ar boneur da savetat o buez da ouspen petap den varnaguent, en eur exposi
bevezh o buez o-unan.

Piou a elfe credi, o va Doue ! penos en eur seurt maleur, e zeus en em gavet
tud criz avoalc'h evit dont da laeres eun ty, epad ma voa tud generus oc'h exposi
o buez evit savetat victimou an dilinch !

Euremment eus niver bras meurbet eus a actionou gaer epad ren ar maleuriou
Morubl, a deu da zoouc'h ar gallo ; actionou pere a zo dign eus ar bras a meuleudi.
Hêñvel an oll dud generus pere a verit hoa admiration a zo impossabl.

Concoude ha ellomp qet miret da zont da laqat anaveout unan benac dionto :
an AA. Lautarcau, Chatlot, ar jandarm Prou, Theophil Luçon, Alexis Luçon,
Davien Blantin ha Fanch Boucher, marioloded.

Calz a vagou, carguet eus a varc'hadoorez, a zo bet collet.

En porz Bouzou, daouzez bag carguet, a zo oll collet ive.

En Pertes, meut a dy a zo discaret; calz a dud bac a loened zo beuzet.

En Pont-ar-L'herzel ar c'hoil a zo eus a dri-uguent mil franc.

Calz a voituriou bac ar pez a gontenent, tud bac oll; a zo collet.

Eun dilijanç en pehini e voa unvec beacker, gonde beza bet traynet gant nerz
ar doureyer, bete ma voe nds, arrêtet etouez ar gouez, o deveus bet ellet, en eur
vilep'eur gorden endro da veg eur vezen, en em savetât etouez ar breuch, en pe-
hoc'h int chommet betec an deiz, pa éruas bagon d'o lemel demeus a eud danger
ger bras, mes peimp dioute a voa et gant au dour.

Ar gouarnamant en em hast da gass eur sicour a bemp million pêvat c'hant mil
franc da victimou an inondation.

En oll ilisou ha chapelou demeus a escopti Nevers, e zeus grêt quesou deiz Gouel
an Oll-Zêz, evit victimou an doureyer bras.

Dragobet an 11^e regimant, a bere ar gundu burzodus a zo dign a admiration,
o deveus digoret eur souscription evit victimou an doureyer.

En Guetin, corf cur vreg a zo bet cavet var brench eur vezan.

Eur plac'h yaouanc, abandonet en eur c'halatrez, hep boued, a voe qer sponsorat, ma z'e deut folles.

Oll draounien al Loir, unan eus ar piavidica contre demeus ar Franç, a zo revinet antieramant.

Ar vagou a yé d'a savetat and dud pere o deyoa ellet pignat er c'halatrezou, hac a greve an doennou evit en em blaci var o lein, a antree dre eno er vagou.

Cazern an A. Blot en deveus recevet l'ou-o'hant victim eus an inondation. Ar vugale hac an dud cos a recevet en hospital; ar re-all a voe repuet gant tud qer. Abaoue an inondation, qer a zistribu bara d'an oll dud maleürus-se, pere a vouel druz var an danvez o deus collet erit biжен. Ar presbital a zo leun demeus an dud maleürus-se.

Tud yaouanc ha martoloded qer, conh evel baguerien Paris, a yé a bep tu da zouguen sicour d'au dud o devoa ellet pignat pe er goyez pe er c'halatrezou.

D'an dud generus hon eus dija hanvet, ec'h ajoutimp : Pér Bechet, demeus a Vilbourn, tost da Saumur, hac e zaou vab; Renard Tortu, Louis Poitevin, Charles Lubin, Gallet, oll eus a Saumur, ba Viçant, martolod. Na aocoudac'haimp qet an A. Doussaint-Péan hac e dud, pere o deveus savetet calz a dud, dreist oll eur porcher hac e bavar buguel. An A. Doussaint en deus repuet en e dy eun trégon den benac, daoust ma voa dija gonezet ar c'hesta estach gant an dour.

An AA. J.-B. Gaudy ha Thuiller o deus ive savetet calz a dud. An A. J. Martin a zo et gant eur gourach dreist-ordinal da savetat pemzec den, pere a voa en eun andret meurbet dangerus.

An A. Gaudry, an tad, en deveus reptet en abaty pemzec victim, da beve s'fournis boued bemdez.

E Sandillon, an A. Tolle, marc'hadour, gapt e zaou vab, en deveus dougouc sicour ha savetet calz a dud.

En Orleans, an oll o deveus disqezet eur gourach ar vrassa.

Nac a actionou gaer all a chommo hép beza anavezet !

Pemzec camt den o deus collet o zyes. Antrepot ar butun a goll pamp ha pévar ugoust mil franc. An doureyer o deveus traynet euo niver bras a vatimanchou, carguet a win, a win-ardant hac a c'hlau-douar.

En Balbigny, eiz ty ha trégon zo distrujet.

En Epercien, sez ty ha daou uguent a zo discaret.

En Andrezieux, cazern ar jandarmeri a zo distrujet.

Tost da Brioud, eur villagen antier a zo sumerjet ha distrujet.

Da gant million e lararer e ya ar c'holloù grët gant an doureyer.

An doureyer a zo en gmennet, hac an dud maleürus chasseet demeus o zyes o deus credet en eur éruout en o logeis, n'o devoa nemet cuntrui o labourenn ordinal. Allas ! va Doue ! en em dromplet int. Dabord, un darn vrás eus an tyez a zo prest da goveza, minet dre an doureyer. Na pebes risq na denfo an dud paour-ze da veza ecrazet dindan !

An edou dastumet a zo collet oll : foenneyer glebyet a vreina, pe a deu d'en em echauffi, ar pez a zo dangerus bras. Eur c'hoez a vreinadur a zo etouez qement a voa en bern. Ar parqeyer, jardinou ha prajeyer a zo goloet eus a eul lic'hid noazuz, pehini a zo demeus ar brassa danger.

Bremâ pa zeo en em dennet an doureyer, e veler penos an darnvua demeus al legumach a vreina var droat, ar pez a ya da laqat cresqi ar vizer.

En emi bastomp-ni eta iye, Bretonet, da zont da zicour victimou an inondation,

ha qerqeut ha ma vezò digoret souscriptionou pe grët qestou en hor brò evit an dud maleürus-se, redomp da zeposi hon offranç, hervez hor moyen.

Un dever qer douç eo sicour an dud maleürus !

FIN.

INVOCATION EN INTERÈST AN DUD MALEURUS

Revinet gant an doureyer bras.

Doue a visericord! demeus a lein an ès
Sellit gant compassion demeus ho pugale,
Reduet d'an oll vizer, en disesper, sivoas,
Dre'r maleuriou éruet dre ar glaoeyer bras.

Oh ! pebes niver a dud a veler a bep tu,
Hep boued, collet gante oll, hac hep nep seurt repu !
Grit antren an esperanç ebars o c'halonou,
Ha scuillit ho madelez varnez, va Autrou !

Pedi a reomp ive ho Mab divir Jesus,
Da reonta'n oll gristenien ar muia generus
En andret ar victimou demeus an doureyer,
Zo rentet hirio an deiz en horrupla mizer.

O Mari ! Güerc'hez santel, Protectourez ar Franç,
Laquit hoc'h oll bugale da zigaç o offranç
Da soulagi o breudeur rentet qer maleürus
Dre ravach an doureyer horrupl ha spouronus.

Mes ni dreist oll, Bretonet, atao güir gristenien,
En em hastomp d'o zicour en o c'her bras anqen :
Doue a lavar deomp soulaji hor breudeur
P'en em gavont reduet d'ar glac'har, d'ar maleur.

~~VS~~ An anter eus ar pez a vezò güerzet demeus ar Recit-ma, a vezò en
profil victimou an doureyer bras.

A.-L.-M. L.

Aut. Léonard